

3. MIK-MIK-MIK...

I

Eur vilin goz ez eus, du-hont 'barz an draonienn ; } (2 wech)
Ar miliner he dalc'h zo kaer e vleo melen...

DISKAN :

<i>Ha mik-mik-mik,</i> <i>Ha mak-mak-mak,</i> <i>Ha oein-oein-oein,</i> <i>Pep unan d'e dro,</i> <i>Maluret !</i> <i>Hag ar vilin a dro...</i>	}	2 wech
---	---	--------

II

Ar miliner he dalc'h zo kaer e vleo melen, (2 wech)
An holl merc'hed tro-dro a ya da gas o greun.

III

Holl merc'hed tro-war-dro a ya da Vilh-ar-Yun
Met ar muia karet a zo Soaz Penn-ar-Run.

IV

Met ar muia karet a zo Soazig ar Born ;
Heñ a grogas 'n he dorm, he zachas en eur c'horn.

V

Heñ a grogas 'n he dorm, he zachas en eur c'horn ;
Diouz safron ar vilin e kouskas Soaz ar Born.

VI

Kousket reas Soazig diouz safron ar vilin,
Ha pa zihunas e oa deuet ar mintin.

VII

— « Petra laro va mamm, pa zistroin d'ar gêr,
« P'am mo kousket eun noz e ti eur miliner ? »

VIII

— « Petra vo laret deoc'h, peogwir me, Matilin,
« E ouzon va micher ha pa dro ar vilin... »

(*Diwar brezoneg Gwened*)